

Adalek 6 vloaz
Pachamama

Film bevaat gant Juan Antin

2018 - Frañs / Luksembourg / Kanada - 1h10

Skignañ : Haut et court

Advouezhiañ e brezhoneg : Dizale

Aozadur an Droidad evit ar skolioù : Daoulagad Breizh - www.daoulagad-breizh.org

Tepulpaï ha Naïra, daou indian yaouank a-orin eus Aradennad an Andoù, a ya kuit eus o c'heriadenn e roudoù ur vandennad Inkaed bet laeret gante Pachamama, totem gwarezus o re. O c'hest a gas anezhe betek Kuzko, ar gêr-benn real, sezizet gant ar Gonkistadored.



Sevenet eo bet ar film-se da enoriñ sevenadurioù an Andoù. Juan Antin a felle dezhañ reiñ ar gaoz d'an Indianed ha displegañ o doare-bevañ, o c'hredennoù.

Penn da benn ar film-se e komprenner aes ha didro pegen bras eo plas an natur : braventez zo bet lakaet er skeudennoù bet graet evit kontañ an istor, ha splann eo emzalc'h doujus an tudennoù, anezhe dileuridi da holl pobloù kentañ Amerika, da geñver an Douar. Ar film a ziskouez ivez penaos omp ni holl, hiniennoù ac'hanomp, elfennoù un hollad, en hor c' humuniezh, en denezh, e-touesk an holl boudoù bev war an Douar. Deskiñ a ra deomp priziañ an holl vadoù profet deomp gant an Natur.

Avantur Tepulpaï ha Naïra a c'hoarvez er XVIvet kantved, ha koulskoude e komz da vugale ar c'hentañ kantved warn-ugent : int ivez a oar pegen pouezus eo doujañ d'an natur, doujañ d'ar pobloù gant o sevenadurioù, doujañ d'an holl, pe baotr pe blac'h.

Kest an daou grennard a raio dezhe kreskiñ ha diskouez splann d'ar re all piv int.

Pachamama a zo anezhi un oberenn deuet kaer gras d'ul lusk seder, un tresañ graet evit daoulagad ar vugale, ha livioù sked-disket.

A partir de 6 ans
Pachamama

Un film d'animation de Juan Antin

2018 – France / Luxembourg / Canada – 1h10

Distribution : Haut et court

Doublage en breton : Dizale

Diffusion de la version bretonne pour les scolaire : Daoulagad Breizh – www.daoulagad-breizh.org

Tepulpaï et Naïra, deux petits indiens de la Cordillère des Andes, partent à la poursuite de la Pachamama, totem protecteur de leur village, confisqué par les Incas. Leur quête les mènera jusqu'à Cuzco, capitale royale assiégée par les conquistadors.



Ce film est un hommage aux cultures andines. Juan Antin donne la parole aux Indiens et expose leur mode de vie, leurs croyances.

Le respect de la nature est naturellement au cœur du film, aussi bien visuellement que dans le quotidien des personnages qui représentent plus largement l'ensemble des peuples amérindiens. Il montre que chaque individu fait partie d'un tout (la communauté, l'humanité, la terre), et nous apprend à respecter les bienfaits que la nature nous offre.

Ancré dans l'histoire, au 16^e siècle, le film aborde des sujets essentiels et d'actualité : le respect de l'environnement, de la diversité culturelle et de l'égalité entre les sexes, avec les deux personnages principaux qui dans leur voyage initiatique vont prendre leur indépendance et apprendre à s'affirmer.

Pachamama est une grande réussite visuelle, avec des partis pris très forts : une animation toute en douceur, avec un trait enfantin et une explosion de couleurs chatoyantes.